



# AR PLAC'H DIEZ DA GOUNTANTI

1

Eur plac'hik yaouank euz a Leon  
A doa pell-zo c'hoant dimezi  
Mez great e doa tro ar c'hanton  
Heb kaout eur goaz da blijout dezhi.

2

C'hoant a doa kaout araok fortuna  
Eur paotrik fur, eur paotr a zoare  
Hag eun den mad d'ober forz petra,  
Ar seurt-se vez ket kavet bemde.

3

Hag eun dervez eun den a feson  
A deuz d'he goulen da zimezi  
Skei a reaz eun taol en e galon  
Kerkent a ma klevaz anezhi.

4

Me a fell d'in kerkent eureujet  
Kaout va dijuni e va gwele  
Ha gant va goaz d'in digaset  
Kafe leaz an dien wargorre.

5

Barz an ti me vezo ar vestrez  
Bragou ha losten vezo ganon,  
Bale eun a ranki aliez  
Plega d'am goaz ne rin foull biken.

6

Labourat a ri war dro an ti  
Goro ar zaout pa pezo amzer  
Keuneud tan a pezo da derri  
Ober stamm ha kempen lereier.

7

Pa zin e kear d'ober va marc'had  
Ar boued ganez a vezo aozet  
Ag en dervez ma ne ri ket mad  
War da ziskouarniou e vezo chachet.

*Reproduction interdite.*

8

Da vutun aveac'h pezo kerc'het  
D'in me a ranki da rei diouztu  
A gantan, me ne vezin ket nec'het  
Buan e vont d'ober marc'had du.

9

Neubendig gwinn a pevez peb miz  
D'in me ranko beza espernet  
Baoue brezel, ganen man ar c'hiz (ar)  
D'eva r'bannig raokmont da gousket.

10

An tamm kig a pezo gant tiket  
Hennez din a reio tri mil vad vad  
D'am c'hoan ganen e vezo drebet  
Rag, me a meuz izom da grenvat.

11

Ne fell ket d'in, eur vech dimezet  
E selfez ouz merc'hed ar c'hontre  
Klevet a meuz penaoz er goazet  
Siouaz!! ne c'heller ket fichout re.

12

Ag en dervez, ma vez bugale  
Te eo n'hini ranko luskellad  
Me jomo braoik e va gwele  
Rag me a zo eur gouskerez vad

13

Ar paotr yaouank respontaz neuze  
Avoalch d'in a peuz lavaret  
Sonjal a ra did ta martreze  
Me a zo klanv gant ar c'hoant merc'het.

14

En eur redet e zeaz ouz an ti  
Ag abaoe n'eo ket bet gwelet  
N'em bije ket a boan e kredi  
Vije ar paotr atao e redet.

**Francis MOAL.**